

D'he ziskibien assambllet e lavarez neuze :
— Dale'hit mad d'ho reolen betek fin ho pue ;
A goude beza roet dezho oll he vennoz,
E kuiteaz ar bed-ma 'vit mont d'ar baradoz.

D'ar bloavez pemp kant trivec'h karget a zantelez,
D'ar bemzek a triugent bloavez euz he vuez,
E varvaz etre divrec'h he venac'h glac'haret,
A gant an oll voa souden evel sant enoret.

E parrezik Pouldahu, gueicha!! e Pouldergat,
E veler eur chapelik en enor d'an abad ;
D'an eil a viz Here e ve pardon ennhi
Da gaout pare euz ar guentr, a bep tu e teuer di.

Da chapelik Sant-Guenal deuit da bardona,
Meur a glanvour 'n'euz kavet iec'het nevez ama ;
Mar pedit gant feiz guirion, eb douetans ebet,
Digant ar Zant d'ho poaniou c'houi po ive remed.

Peb tra a lez sant Guenal evit klask an Envou,
He gorf dre ar binijen a bleg d'ar vertuziou.
Greomp eveltan, kristenien, a deskomp beza fur :
Goulennomp ouспен iec'het dreist-holl eur galon pur.


IMPRIMATUR :

14 Janvier 1922.

A. COGNEAU,
Vic. gén.



GUERZ



VAR TON : *Propagation ar Feiz.*

Eur-bugel hanvet Guenal diskib sant Guenole,
A bet e Landevennek abad en he c'houde,
'Vel tad n'oa Romelius, evel mam Levenez,
Daou bried a ne glaskent nemet ar Zantelez.

Sant Guenal ez vianik a oa flam da velet,
A oa flam e peb feson a gorf ak a speret,
Douget d'an oll vertuziou, a dreist-oll d'an dousder ;
Guenal d'an oll vugale c'helle servich da skuer.

Eun devez sant Guenole, ganthan daou vanac'h all,
A zigouezas da dremen abiou maner Guenal ;
Ar bugel var an treujou a zelle dioutha :
Guenole ouz he velet en devoa melz ennha.

— Va-mab, kontant e vijac'h, eme sant Guenole,
Da zont da Landevennek da zervicha Doue ?
— Ia, va zad, emezhan, kontant on, kontant on,
A ganeoc'h c'houi d'ho kouent e zin a greiz kalon.

Rak hervez an Aviel ne zaimp ket d'an Envou
Ma ne guitaomp 'vit Doue hon tadou, hor mamou,
Hor breudeur, hor c'hoarezet, heritaj a danvez,
Pep tra rankomp dilezel 'vit senti ouz he vouez.

Guenole ak he venac'h a zo souezet meurbet
O klevet gant eur bugel eur respont ken parfet.
— Va mabik-kez, emezhan, va mabik, va mabik,
Goall yaouank c'hoas ho kavan, gortozit eun tamik.

Hogen ar bugel yaouank a ree implij dija
Euz an Testament nevez a oa desket deza.
Ak evel ar veichkenta e respont adarre
Evel ma vije eun El diskennet euz an Ee.

— Penaoz-ta, va zad abad, eme ar c'hrouadur,
A n'ouzo'h c'houi ket petra 'zo merket er Skritur.
Lakat an dorn en alar a distroi adarre
A zo distroi ouz guir hent rouantelez an Ee.

A c'houi a c'helfe kredi e ven ken digalon
Betek kemer an hent fall e lec'h an hent guirion ?
Na karantez va c'herent, na netra euz ar bed
Na rei din biken renons d'ar pezh am euz sonjet.

Joa oa gant sant Guenole klevet ar respont-se,
Digemer a ra Guenal etouez he vugalê,
Ak evel daou bez arc'hant er memez moul teuzet,
N'o doa mui met eur galon a nemet eur speret.

Pa oa digouet er gouent ar venac'h a grede
E tisterache buan an oll mennoziou-se ;
Mez furnez ar c'hrouadur voa furnez an Envou
Ak a ye va gresk da c'hent he vloaveziou.

'Vit miret ar burete a garie dreist peb tra
Ar rusta pinijennou 'vintha ne oant netra,
Ken a c'helfer lavaret e voa kentoc'h eun El
Eget eun den bet sujet d'an tech orijinel.

Pa zantaz sant Guenole e voa tost ar maro,
E c'halvaz he oll venac'h ak laraz dezho :
— Mar a fell deoc'h c'hoaz ober eur blijadur d'o Tad
Choazit evit ho pleina Guenal evel abad.

E kouent Landevennek Guenal 'jomaz seiz vloaz ;
Neuze gant unnek manac'h e treuzaz ar mor braz
Da velt menec'h santeloc'h var douarou Bro-Zaoz,
A deski guell, emezhan, guir hent ar baradoz.

Goude beza tremenet pevar vloaz er vro se,
O labourat da c'honit kalz eneou da Zoue,
Gant he anterkant diskib e tistro da vro Breiz
'Vit tec'het 'eok an enor ken karet gant aleiz.

E kouent Landevennek e chomaz eur mare,
Goudeze en em dennaz n'eur c'horn all a Gerne,
Ak enno gant kals breudeur leun a zoujans Doue,
'Noa great he zonch da dremen ar rest euz he vue.

O vont eun deiz da velet he vignon Karado
Setu en he lochennik o lammet eur c'haro
Pouchuet gant chass Rivoal pe ar roue Hoel,
Ar paour kez loen a guzaz dindan korn he vantel.

Kerkent evel dre vurzud ec'h eanaz ar chass
Da bourchu al loen spontik, da chalpat a da gass :
Kerkoulz ak eur gourc'hemen voa mouez ar Zant dezho,
Lipa a reont he zaouarn o lezel ar c'haro.

Guenaelien ar Roue a zo oll estonet,
D'ho mestr e zeont da gonta ar pezh 'zo c'hoarvezet ;
Sant Guenal a zo galvet da balez ar Roue
Hemañ a ginnig dezhan aour, arc'hant a leve.

Da veva en he vaner Rivoal her ped ive,
Dre ma anaie parfet e voa eun den Doue.
Mez sant Guenal o santout he dermen diveza
Da zont en dro d'he c'houent a c'houlen digantha.